

**Staj c'hoariva digor d'an holl
Deraouidi ha re o deus skiant-prenet**

Fent du ar c'hoariva Bro Iwerzhon !

Gant Bláithín Conneely-Allain

25-26 a viz Du 2017
Jit Stread ar Skol
Sant-Kadou (29)

Evit labourat war al leurenniñ, an tudennoù, ar c'hoari...

Programm ar staj :

Adalek pennadoù eus "Lapous-den Penn ar Bed" (un droidigezh eus ar pezh-c'hoari brudet-mat / brudet-fall "The Playboy of the Western World" skrivet gant J.M. Synge) e vimp awenet gant tudennoù kevredigezh divyezhek ar beizanted eus Kornog Bro Iwerzhon.

Klask a raimp sevel ur stumm berr eus an istor hag e leurenniñ evit diskouez buhez serr an inizi.

C'Hoari a raimp gant temoù ar pezh : ar muntr, ar sekred, ar pennden, ar gevier, an huñvreoù, ar feulster...

Mont a raimp donoc'h e pep tudennoù gant doareoù c'hoariva a bep seurt : reuzc'hoari, farsadenn, melodrama...

C'Hoari a raimp gant barzhoniezh ar yezh evit mont ar pellañ ganti.



Skeudenn evit *The Playboy of the Western World*
gant Seán Keating

Ar stummerez :



A orin eus Bro Iwerzhon eo Bláithín. A-vihanik eo bet boaz d'ober gant div yezh : saozneg ha gwezeleg.

Studiet he doa al lennegezh hag ar c'hoariva en Drama Society e Skol-Veur Dulenn ha tro he doa bet eno da labourat gant skipailh ar Monty Python. Goude he studioù he doa kemeret perzh en ur strollad-red a c'hoarie pezhioù Shakespeare en un doare poblek.

O vevañ e Breizh emañ bremañ ha komz a ra galleg ha brezhoneg.

Kenderc'hel a ra gant ar vicher komedianez e meur a strollad ha treuzkas a ra ar c'hoariva er skolioù, e stalieroù-labour hag e stajoù. Furlukinez eo Bláithín ivez (en ospitalioù da skouer gant Rêves de clown).

Priz ar staj :

- **55€** an dibenn sizhun / **30€** arrez

- **45€** evit studieren pe dud dilabour / **20€** arrez

*Ma n'och ket ezel eus C'hoariva pe o kemer perzh en ur strollad ezel eus C'hoariva e rankoc'h paeañ ar skodenn : **10€**.*

Ouzhpennañ **15€** evit an nozvezh e Jit Straed ar skol (lec'h ar staj : <http://www.gitesdelecole.com>)

Da gas ganeoc'h : boued evit ar predoù (da rannañ gant ar stajidi all m'ho peus c'hoant) hag an dijuni + ur sac'h kousket

Eurioù ar staj :

Sadorn : 10e30 - 6e noz

Sul : 9e30 - 5e noz

Evit lakaat ho anv :

Skrivet da C'hoariva :
choarivabrezhonek@gmail.com
Pe bellgomzit deomp :
06 38 78 35 15

Arreziou :

Da gas da urzh C'hoariva
13 straed Mikêl an Nobletz
29100 Douarnenez